

# CHANSONNIOU BREZOUNEK

## Son Job al Lounker

1.  
Disul pou deuet Job d'ar gear  
E voa mezo vel er gellen,  
E vreg Janed enha grogas.  
E astennas var an daol vraz,  
Ho diga, diga, diga,  
Nag evid er sebeila,  
E la roulon la e la roulon la.

2.  
Eur chapel gadr e oa savet  
En enor d'an den tremenet,  
Dour beoniget en he gichen  
Gant an diou pe deir e'houlaonen,  
Ho diga, diga, diga,  
Va Jobig paour zo tremenet,  
E la roulon la e la roulon la.

3.  
Setu Janed dre ar borrez  
Da voela gant trididigez,  
Va Jobig paour zo tremenet,  
Bremen me zo dibarrassel,  
Ho diga, diga, diga,  
Tremenet Job en eur loanka,  
E la roulon la e la roulon la.

4.  
Evel ma oa ar c'hiz er vro  
Da veilla gant an dud varo,  
Kerkeri m'oa hunter-ouez sonet,  
Job an draillen skuz o kousket,

Ho diga, diga, diga,  
A loa eta dihmet,  
E la roulon la e la roulon la.

5.  
Pebez spoutaden voa eno  
O velet sevel an den maro,  
Pep hini grog en e gador  
Hag a la buhan da glask an nor,  
Ho diga, diga, diga,  
Job ar lonker resussitet,  
E la roulon la e la roulon la.

6.  
Va Jobig paour, eme Janed,  
Kredi rea d'in oas tremenet,  
Laket e moa foulla daou vez  
En aviz mervel hon daou assamblez,  
Ho diga, diga, diga,  
Chaned, c'houi zo zod mad da staga,  
E la roulon la e la roulon la.

7.  
Ne lakin tui diadan ma fri :  
Na gwin, na chist, nag odivi,  
Ho diga, diga, diga,  
Dizonet mad er oam breuna,  
E la roulon la e la roulon la.

PAOTR KEMPER.

## CHANSON AN DIMEZIOU

(Soun Yann al leue)

1.  
Selaout kana eur zon vraz  
A zo etruet shars ho pro  
Gant daou zen yaouank eueujet,  
Selaout mar kirit klevet.

2.  
Ar goaz nevez felle d'eun mond abred  
En e vele da gousket  
Mes ar vaouez ne c'hoanteas ket  
Mond en e guele ken abred.

3.  
Ma voa guisket ar ribot  
Laket e guele an den sot,  
Chouchet gant an dilhad gwelc,  
Setu troumpet Yann al leue.

4.  
Yann al leue, pa zihunas,  
Ouz e vaouez koant e troas  
Hag hen komans d'he briata,  
Ne bilje tan marse d'eta.

Ton anavezet : Koublat an hini gaz.

5.  
Ker kalet e kave be c'hroc'hen  
Evel ar miran pe ar planken,  
Ha va Yann haour mond e koler  
Tol ar ribot ouz ar zolier.

6.  
Ma voa ner'het an dud keiz  
O klask dile'her o gatal reuz,  
Yann al leue kaas dezo  
Ne bilje tamm da dud ar vro.

7.  
Goude va da glask e vestrez,  
En ostleri e voa mesvez,  
Mez dont d'ar gear vo ar gousc  
Pa ne c'helle tui choum en he za.

8.  
Dont a ra d'ar gear en eur voela  
O velet petra zo gant d'eta,  
Diuallit paotred pa roech e la cour,  
Kals ens ar merv'bed zo treitour.

## Lezenn voti ar merc'hed

War ton : Les fraises et les framboises.

Selaout, penn da benn,  
Sonjit mad en eoni !  
Hana zo a lezenn  
D'ar merc'hed da voti,  
Hag evid ar voazed,  
E c'hellit ne neuze  
Beza eur senateur  
Petramant deputé.

KENTA DISKAN

Hela ! Hela ! Merc'hed,  
No dit ket la sta gredi  
N'eo ket c'hoaz sorlet  
Ho lezenn d'eo'h da voti.

Ha ma c'hellit kred,  
Holl e vezint kontant  
Da veza eur roue  
Pe zoken president,  
Bak en holl afferjou  
Karoni lakat o tri  
Ha fonge a vez enno  
Pa c'hellont komandi.

D'an diskon kenta.

Kement-se, ya merc'hed,  
Ma fell d'eo'h komandi,  
Pa deuit ar brezel,  
Z'eo'h ive en hor plav ni  
Da gastez ar vro,  
Me lavar d'ar frontier,  
D'arrei an enebour,  
Pe d'e gas d'ar gre.

D'an diskon kenta.

En deiz all dija,  
Eur vaouez pavidik  
A sonje e voa er gamp  
O c'hober pollik,  
Hag hi a lavare

Ledan bras he ginou !  
Ar c'henta ma c'helle  
E c'henche lezennou.

D'an diskon kenta.

N'eo ket ar brezel  
A loa en he fetu,  
Mez evid ar voazed  
E rafe evid lezenn :  
Pan d'eo c'hoant dimezi,  
An holl paotred yaouank  
Ranko skriva d'ez  
Vit kaout e c'honsantamant.

D'an diskon kenta.

Hag eur wech dimezel,  
N'ouz ket beac'h da c'hoarzin,  
E suprimu d'ar voazed  
Ar c'hale hag ar gwin,  
Eur wech bendez hebken,  
Peh a gornad hutan  
Ha koulsket gant ar vreg  
Nemet eur vech ar ziann.

D'an diskon kenta.

Hag ar goaz en deuz  
Denabijet e c'brag,  
Hel fruz hag heb damant,  
A vezo koulounet,  
Krogel vezo ennan,  
Tadok en eur prizon  
Hel goulen digantan  
Petra eo ar rezon.

EIL DISKAN

Ha ma vez an oll boazid  
Evel d'omp o santimant,  
Ne zartio biken merc'hed,  
Me lavar d'eo'h frouchamant.

A. B.

## Son ar bicyclett

1.  
An deiz all eur paotrik yaouank  
Na mont da bourmen en doa c'hoant,  
Tra la la la  
Na mont da bourmen en doa c'hoant.

2.  
Ma kemeras e vicyclett,  
Eteit a rimier e vao est,  
Tra la la la  
Eteit a rimier e vao est.

3.  
Diouz an noz pa deus en dro,  
E dad a voa nec'het maro,  
Tra la la la  
E dad a voa nec'het maro.

4.  
Penzoz va mah paour emezan,  
Diou vicyclett e peuz breman,  
Tra la la la  
Diou vicyclett e peuz breman.

5.  
Kredi a ran peuz bet laeret,  
Espika d'in a vezo red,  
Tra la la la  
Espika d'in a vezo red.

6.  
Lezit va zad ma kontin deoc'h,  
Ha neuze zur e kompreno'h,  
Tra la la la  
Ha neuze zur e kompreno'h.

7.  
Mintin ma p'om est da bourmen,  
Meus kavet va douz var va hent,  
Tra la la la  
Meus kavet va douz var va hent.

8.  
An amzer a voa tomn meurbet,  
An disheol hon deuz bet klasket,  
Tra la la la  
An disheol hon deuz bet klasket.

9.  
Var ar geol glas p'oump azezet,  
Kals eus e dillad deus tennet,  
Tra la la la  
Kals eus e dillad deus tennet.

10.  
P'oa dija hanter zivisket,  
Va dous d'in en deus lavaret,  
Tra la la la  
Va dous d'in en deus lavaret.

11.  
Selaou ganen Salk emez,  
Me rei d'in ar pez a gari,  
Tra la la la  
Me rei d'in ar pez a gari.

12.  
Choaz ar pez a biljo ganet,  
Netra d'in ne refuzin ket,  
Tra la la la  
Netra d'in ne refuzin ket.

13.  
Kredi roec'h n'ouz ket bet nec'het,  
E meus choazet ar bicyclett,  
Tra la la la  
E meus choazet ar bicyclett.

14.  
Sod so al louarn ma vel ar yar,  
Na ma ne da ket d'he diskar,  
Tra la la la  
Na ma ne da ket d'he diskar. Fine ANDRE.

Goulenit an diskou savet ha renket gant Andre Bars, en ho tispozision evid ar triciojou.

# CHANSONNIQU

## Son Job al Louunker

1.

Disul poa deuet Job d'ar gear  
E voa mezo vel er gelien,  
E vreg Janed enna grogas,  
E astennas var an daol vraz,  
Ho diga, diga, diga,  
Nag evid er sebeila,  
E la roulon la e la roulon la.

2.

Eur chapel gaer e oa savet  
En enor d'an den tremenet,  
Dour benniget en he gichen  
Gant an diou pe deir c'houlouen,  
Ho diga, diga, diga,  
Va Jobig paour zo tremenet,  
E la roulon la e la roulon la.

3.

Setu Janed dre ar barrez  
Da voela gant tristidigez,  
Va Jobig paour zo tremenet,  
Bremant me zo dibarrasset,  
Ho diga, diga, diga,  
Tremenet Job en eur lounka,  
E la roulon la o la roulon la.

4.

Evel ma oa ar c'hiz er vro  
Da veilla gant an dud varo,  
Kerkent m'oa hanter-noz sonet,  
Job an druillen skuz o kousket,



Ho diga, diga, diga,  
A ioa eta dihanet,  
E la roulon la e la roulon la.

5.

Pebez spountaden voa eno  
O velet sevel an den maro,  
Pep hini grog en e gador  
Hag a ia buhan da glask an nor,  
Ho diga, diga, diga,  
Job ar lonker ressusitet,  
E la roulon la e la roulon la.

6.

Va Jobig paour, eme Janed,  
Kredi rea d'ja oas tremenet,  
Laket e moa toulla daou vez  
En aviz mervel hon daou assamblez,  
Ho diga, diga, diga,  
Chaned, c'houi zo zod mad da staga,  
E la roulon la e la roulon la.

7.

Ne lakin mui dindan ma fri :  
Na gwia, na chist, nag odivi,  
Ho diga, diga, diga,  
Dizonet mad ez oun brema,  
E la roulon la e la roulon la.

PAOTR KEMPER.

# BREZOUNEK

## CHANSON AN DIMEZIOU

(Soun Yann al leue)



Ton anavezet : *Koublat an hini goz.*

1.

Selaouit kana eur zon vrao  
A zo erruet ebars ho pro  
Gant daou zen yaonank eureujet,  
Selaouit mar kirit klevel.

2.

Ar goaz nevez felle d'eun mond abred  
En e vele da gousket  
Mey ar vaouez ne c'hoanteas ket  
Mond en e guele ken abred.

3.

Ma voa guisket ar ribot  
Laket e guele an den sol,  
Chouchet gand an dihâd gwele,  
Setu troumplet Yann al leue.

4.

Yann al leue, pa zihunas,  
Ouz e vaouez koant e troas  
Hag heu komans d'he briata,  
Ne blijje tam morse d'eza.

5.

Ker kalet e kave he c'hroc'hen  
Evel ar mean pe ar planken,  
Ha ya Yann laour mond e koler  
Tol ar ribot ouz ar zolier.

6.

Ma voa nec'het an dud keiz  
O klask dele'her o gatal reiz,  
Yann al leue kaos dezo  
Ne blijje tamm da dud ar vro.

7.

Goude ya da glask e vestrez,  
En ostaleri e voa mesvez ;  
Mez dont d'ar gear vo ar goasa  
Pa ne c'helle mui choum en he za.

8.

Dont a ra d'ar gear en eur voela  
O velet petra zo great d'eza,  
Diouallit paotred pa roech « la cour »,  
Kals eus ar merc'het zo treitour.

# Lezenn voti ar merc'hed

War ton : *Les fraises et les framboises.*

Selaouit, penn da benn,  
Sonjit mad en enai ;  
Hano 'zo a lezean  
D'ar merc'hed da voti.  
Hag evel ar voazed,  
E c'hellint le neuze  
Beza eur senateur  
Petramant député.

## KENTA DISKAN

*Hola ! Hola ! Merc'hed,  
Na dit ket 'la da gredi  
N'eo ket c'hoaz sortiet  
Ho lezenn d'eo'h da voti,*

Ha ma c'hellit kredi,  
Holl e vezint kontant  
Da veza eur roue  
Pe zoken presidant.  
Rak en holl allerjou  
Karont lakât o fri  
Ha fouge a vez enno  
Pa c'hellout komandi.

## D'an diskant kenta.

Kement-se, ya merc'hed,  
Ma fell d'eo'h komandi,  
Pa denio ar brezel,  
Z'eo'h ive en hor plas ni  
Da gostez ar vro,  
Me lavar d'ar frontier.  
D'arreti an enebour  
Pe d'e gas d'ar ger.

## D'an diskant kenta.

En deiz all dija,  
Eur vaouez pänvidik  
A sonje e voa er gampr  
O e'hober politik,  
Hag hi a lavare

Ledan bras he ginou ;  
Ar c'henta ma c'helle  
E chenchfé lezeannou.

## D'an diskant kenta.

N'eo ket ar brezel  
A ioa en he fenn,  
Mez evit ar voazed  
E rafe eul lezenn ;  
Pan d'eo c'hoant dimez,  
An holl paotred yaonank  
Ranko skriva d'ezi  
Vit kaout e c'honsantamant.

## D'an diskant kenta.

Hag eur wech dimezet,  
N'euz ket leac'h da c'hoarzin,  
E suprimo d'ar voazed  
Ar c'hafe hag ar gwin.  
Eur wech hembdez behken,  
Peb a gorniad butun  
Ha koulsket gant ar vreg  
Nemet eur vech ar ziaun.

## D'an diskant kenta.

Hag ar goaz en dro  
Dezoblijet e c'hreg,  
Heb truez hag heb damant,  
A vezo kondaonet.  
Kroget vezo ennan,  
Taolet en eur prizon  
Heb goulenn digantan  
Petra eo ar reizou.

## EIL DISKAN

*Ha ma vez an oll voazed  
Eeul d'omp o zantimant,  
Ne zortio biken merc'hed,  
Me lavar d'eo'h franchamant.*

A. B.

Goulennit an diskou savet ha renket gant Andr

# Son ar bicyclett

1  
An deiz all eur patrik yaouank } 2 vech.  
Na mond da bourmen en doa c'hoant, }  
Tra la la la  
Na mond da bourmen en doa c'hoant.

2  
Ma kemeras e vicyclett, } 2 vech.  
Eleit a rimier e vao eat, }  
Tra la la la  
Eleit a rimier e vao eat.

3  
Diouz an noz pa deus en dro, } 2 vech.  
E dad a voa nec'het maro, }  
Tra la la la  
E dad a voa nec'het maro.

4  
Penaos va mab paour emezan, } 2 vech.  
Diou vicyclett e peuz breman, }  
Tra la la la  
Diou vicyclett e peuz breman.

5  
Kredi a ran peuz hel laeret, } 2 vech.  
Esplika d'in a vezo red, }  
Tra la la la  
Esplika d'in a vezo red.

6  
Lezit va zad ma kontin deoc'h, } 2 vech.  
Ha neuze zur e komprenoec'h, }  
Tra la la la  
Ha neuze zur e komprenoec'h.

7  
Mintin ma p'van eat da bourmen, } 2 vech.  
Meus kavet va dous var va hent, }  
Tra la la la  
Meus kavet va dous var va hent.

8  
An amzer a voa tomm meurbet, } 2 vech.  
An disheol hon deuz bet klasket, }  
Tra la la la  
An disheol hon deuz bet klasket.

9  
Var ar geot glas p'oamp azezel, } 2 vech.  
Kalz eus e dilliad deus tennet, }  
Tra la la la  
Kalz eus e dilliad deus tennet.

10  
P'oa dija-hanter zivisket, } 2 vech.  
Va dous d'in en deus lavaret, }  
Tra la la la  
Va dous d'in en deus lavaret.

11  
Sefaoz ganen Saik emezi, } 2 vech.  
Me rei d'it ar pez a gari, }  
Tra la la la  
Me rei d'it ar pez a gari.

12  
Choaz ar pez a blijo ganet, } 2 vech.  
Netra d'it ne refuzin ket, }  
Tra la la la  
Netra d'it ne refuzin ket.

13  
Kredi reoc'h n'oan ket bet nec'het, } 2 vech.  
E meus choazet ar bicyclett, }  
Tra la la la  
E meus choazet ar bicyclett.

14  
Sod eo al louarn ma vet ar yar, } 2 vech.  
Na ma ne da ket d'he diskar, }  
Tra la la la  
Na ma ne da ket d'he diskar. Fine ANDRÉ.

# SONIOU BREIZ

## SON AR MARTOLOD YAOUANK

Wor eun ton brudet.

1.  
Ma nijc eun lamm paper gwenn  
Eur banc flou hag eur blucenn,  
Me maa skrivet eul lizer  
Hag a ve d'oret  
Var sujet eur femelen  
Hag en deus kalonal.

O rein en o c'hoezek  
Me jonc d'in-me e vagen  
Eur verc'h fur ha parfet.

2.  
He maaun, ouz e c'honsideri,  
Eun delz a c'houennas outi :  
Douzivel bras ha kavan,  
Va merc'hig Madeline,  
Ker melen eo ho piloz  
Evel ar bot chifone.

3.  
Va maaun, ma ne peuz eur memor vad,  
D'ar mennez deiz, d'ar mennez oad,  
Ne peuz nemet pennek vloaz  
O rein en o c'hoezek  
Na pa ne peuz konfranguel  
Va zad d'ho kemeret.

3.  
Va maaun, evit donet d'am yac'hat  
Me ranke kaout eur paotr delikat  
A zo eot d'an Hall  
Eun nebet amzer az ;  
Ma ne deus ket d'az gear,  
Raez vo euz va maro.

6.  
Va merc'h, leskomp hon diskourchou  
Ha deomp da skriva lizerou  
Da gas d'ar martolod yaouank  
Da bressa e gouje.  
Joa bras a wez guntan  
Pa gwele kement-se.

4.  
Va merc'h, gance'hoed, me zo souezet  
E ve c'hou tromplet ken abret,  
Ne peuz nemet pennek vloaz

7.  
Tri c'hanit skoed en arc'hant gwen  
Ha kement all en aour melen  
Zo kaset d'ar martolod  
Ne goll ket lant e bean,  
Bed en deuz eur femelen  
Hag eur martolod lhan.

EUR CHASTELLAD.

## SON AR BOESOUN

1.  
Klevomp tout kama eur zou vreo  
Var gaout hini a vez mezo ;  
Evit ma klevo pep hini  
Ar virenez hep damant.

7.  
Hirio eo leun-beleg krevi,  
Vare'hoaz n'en do lamm da zribi,  
Gant ma kavo atao da eva  
Ne ra ket foutre kaer emeza.

2.  
Goulskoude me a oar er vad  
E mo outo eur goall grogad  
Pa zint tud fur var o memo  
An oll die kemez skouier diouto.

8.  
Eur c'hreg zo troet da eva,  
En he zi e vanko pep tra ;  
E leac'h prena pep hag holenn  
Va c'haga a lipo he guereun.

3.  
Ket, yaouank, paour ha pinvidig  
Terrubl in dre nerz o lammig  
Hag an dud krefa gwezeka  
En o c'hevver ne dint netra.

9.  
Ne zeus netra ken divalo  
'Vid gwelet eur vaouez mezo ;  
Roched an ozac'h zo gwerzet,  
C'hoaz e lavaro vo kollet.

4.  
An ozac'h mezo a lavar  
Er barrez ma neus ket va far ;  
E greek, e zaout emezar  
Eo ar re wella 'zo er vro-man.

10.  
Surlout pa gav mad odivi  
Vez ket pell o kempen he zi ;  
Kar gwerza rate al loundourenn  
He bragez kouls hag he lostenn.

5.  
En ostaleri e vo digemeret mad  
Ket ha ma pado e yac'had ;  
Mes pa ne vo mui guenneg ebet  
Dustu er meaz e vo fañset.

11.  
Gwelet e vez ar yaouankitron  
Alles e bars lunt ar forniou  
O vanet ebars an ostaleri  
Ha pa zorfout e vez ruz o fri.

6.  
Pa vez ur'h eva odivi  
Neus keat ebet par d'e hini ;  
Labourret mat e zourou  
Geot ket hag hen en e brajou.

12.  
Ha pa vez poent da zout d'ar gear  
Vez kollet ar paourkeaz paner ;  
Setu penaos hazz ar fermion  
E vez kollet paner ar viou.

## Intanv al Lochenn

1.  
Er bed-man nag aour nag arc'hant  
Biskoz n'o deuz chalmet va ehalon,  
Ma'zo eur paourkeaz paisant  
Kontant edon em fozision  
Met va fried karantezus  
A gollan hirio, pebez anken !  
Gwellt ha n'oun ket maledrus  
G'hoazec'h krouadur an euz em lochen. (bis)

Sehlantout a ra d'in gwelout  
He maaun denier ebaz em c'hichen,  
En despet d'am c'heuz dicemet  
Ouz c'hoaz euzus ebaz em lochen. (bis)

2.  
En amzer m'oa beo va fried  
He fuzhez a chalme va ehalon  
Va bugale euz va c'haret  
A roe d'in konsalasion  
Beh eil holl e poken l'ez  
Eun tad euzusoc'h ne vo faken  
Dre o jecton teher bende  
Edon euzus ebaz em lochen. (bis)

5.  
O, ma c'hellfen hep kaout mizer  
Sevel ha desk va bugale  
E c'hellfen c'hoaz gant an amzer  
Fortunia va merc'hig, mactez.  
Kapubl da labourat an dachenn  
Neuze va faotred a vo bras  
Em c'horni me a c'hello c'hoaz  
Beva euzus ebaz em lochen. (bis)

3.  
D'ar mitali pa 'ran d'ar parkou  
Adarre da goumans va dervez,  
E lezan va bugaligou  
Euz va zi da gemeret evez.  
Hag en noz pa deuan en dro  
Evit va distret euz va anken  
En em stardont holl war va zro  
D'am c'honoll ebaz em lochen. (bis)

6.  
Euzusec'h c'hoaz me n'em gavi  
P'o gwelto n'o c'houmit e bara  
Neuz pa zentis ar maro  
Euz ar bed-man d'am delivra  
Va mignoned am interro  
Gant va fried pe en he c'hichen,  
Ha va bugale a ranno  
Va zanna tiegez ha va lochen. (bis)

4.  
Bras eo va laouenedigez  
Pa vrazan er p'ez gant va ziad.  
Met pa vellan va merc'hig kee  
An dour a deuz war va douzlagad :

7.  
Em gwele douar pa vezin  
O repoz e hered Rumengol  
P'ijet kemer truz ouzou  
O Irou Varia Remed-Hall  
Ha pa deuto va bugaligou  
War va bez da ober o fedenn  
Va Doue c'houi a hardoune  
Da ene paour Intanv al Lochenn. (bis)

## LE VEUF DE LA CHAUMIÈRE

1.  
De tous les riches d'ici présent  
Je n'envie pas la richesse.  
Je ne suis qu'un pauvre paysan  
Qui vient de perdre sa maîtresse.  
La mort me ravit aujourd'hui  
La plus aimable ménagère,  
Voyez comme je suis redouté !  
J'ai six enfants dans ma chaumière. (bis)

4.  
Ah ! si je pouvais réussir  
À bien élever ma famille,  
Peut-être qu'un jour à venir  
Je pourrais marier ma fille.  
Alors mes garçons seront grands,  
Ils pourront labourer la terre.  
J'aurais espoir dans mes vieux ans,  
De vivre heureux dans ma chaumière. (bis)

2.  
Lorsque mon épouse vivait  
Je l'adorais pour sa sagesse.  
Elle et puis mes enfants m'aimaient,  
Souvent me comblaient de caresses ;  
Je les embrassais tout à tour,  
Ah ! que c'était doux pour un père !  
Par leurs caresses chaque jour  
J'étais heureux dans ma chaumière. (bis)

5.  
Et je serai bien plus heureux  
Si j'les voyais gagner leur vie  
Et si la mort fermait mes yeux,  
En tranchant le fil de ma vie,  
Tous mes amis m'enterrentont  
Quand j'aurai fini ma carrière.  
Et mes enfants partageront  
Mon petit bien et ma chaumière. (bis)

3.  
Le matin quand je vais aux champs  
Continuer mon labourage,  
Je laisse mes pauvres enfants  
Gouverner mon petit ménage  
Le soir quand je rentre chez moi,  
Pour me faire oublier leur mère,  
Ils viennent tous autour de moi  
Me consoler dans ma chaumière. (bis)

6.  
Lorsque du sommeil de la Foi,  
J'ai dormi au cielitère,  
Daignez avoir pitié de moi  
Vierge de Rumengol, ma mère !  
Quand mes enfants, dans ce saint lieu,  
Viendront prier sur ma poussière,  
Vous pardonnez, ô mon Dieu !  
Au pauvre veuf de la chaumière. (bis)

"La Voix de son Maître", merket war diskou gramophon (mouez an itron Barz hag acordeon an aotrou Bars.)

# SONIOU

## SON AR MARTOLOD YAOUANK

*War eun ton brudet.*

1.

Ma mije eun tamm paper gwenn  
Eur banc liou hag eur bluenn,  
Me moa skrivet eul lizer  
Hag a ve dereat  
Var sujet eur femelen  
Hag en deus kalonad.

2.

He mamm, ouz e c'honsideri,  
Eun delz a c'houlennas outi :  
Dourlivet bras ho kavan,  
Va merc'hig Madelone,  
Ker melen eo ho pijaz  
Evel ar bot chifone.

3.

Va mamm, evit donet d'am yac'hat  
Me ranke kaout eur paotr delikat  
A zo eat d'an Itali  
Eun nebeut amzer zo ;  
Ma ne deu ket d'ar gear,  
Kaor vo euz va maro.

4.

Va merc'h, gance'houi, me zo souezet  
E ve c'houi troumplet ken abret,  
Ne peus nemet pemzek vloaz

O rein en o c'hoezek  
Me jonje d'in-me, e vagen  
Eur verc'h, fur ha parfet.

5.

Va mamm, ma ne peuz eur memor vad,  
D'ar memez deiz, d'ar memez oad,  
Ne poa nemed pemzek vloaz  
O rein en o c'hoezek  
Na pa ne poa kontrangnet  
Va zad d'ho kemeret.

6.

Va merc'h, leskomp hou diskourchou  
Ha deomp da skriva lizerou  
Da gas d'ar martolod yaouank  
Da bressa e gonje.  
Joa bras a vezo ganlan  
Pa glevo kement-se.

7.

Tri c'hant skoed en arc'hant gwen  
Ha kement all en aour melen  
Zo kaset d'ar martolod  
Ne goll ket tout e loan,  
Bed en deuz eur femelen  
Hag eur martolod bihan.

EUR CHASTELLAD.

# BREIZ

## SON AR BOESOUN

1

Klevomp tout kana eur zon vras  
Var gement hini a vez mezo ;  
Evit ma klevo pep hini  
Ar virionez hep damantli.

2

Goulskoude me a oar er vad  
E mo outo eur goall grogad  
Pa zint lud fur var o meno  
An oll die kemer skouer diouto.

3

Koz, yaouank, paour ha pinvidig  
Terruhl in dre ners o bonnig  
Hag an dud krefa gwizieka  
En o c'heuver ne dint netra.

4

An ozac'h mezo a lavar  
Er barrez ma neus ket va far ;  
E gezek, e zaout emezar  
Eo ar re wella 'zo er vro-man.

5

En ostaleri e vo digemeret mad  
Keit ha ma pado e yalc'had ;  
Mes pa ne vo mui guenneg ebet  
Dustu er meaz e vo taolet.

6

Pa vez oc'h eva odivi  
Neus kear ebet par d'e hini ;  
Labourer mat e zouarou  
Geot keit hag hen en e brajou.

7

Hirio eo leun beteg krevi,  
Varc'hoaz n'en do tamm da zribi,  
Gant ma kavo atao da eva  
Ne ra ket foutre kaer emeza.

8

Eur c'hreg zo troet da eva,  
En he zi e vanko pep tra ;  
E leac'h prena pep hag holenn  
Va c'haga a lipo he gwerenn.

9

Ne zeus netra ken divalo  
'Vid gwelet eur vaouez mezo ;  
Roc'hed an ozac'h zo gwerzel,  
C'hoaz e lavaro vo kollet.

10

Surtout pa gav mad odivi  
Vez ket pell o kempen he zi ;  
Kar gwerza rafe al loundourenn  
He bragez koulz hag he lostenn.

11

Gwelet e vez ar yaouankizon  
Alies e hars tout ar foarion  
O vonet ebars an ostaleri  
Ha pa zortiont e vez ruz o fri.

12

Ha pa vez poent da zont d'ar gear  
Vez kollet ar paourkez paour ;  
Setu peanos barz ar fermion  
E vez kollet paour ar viou.



# Intanv al Lochenn

1.

Er bed-man nag aour nag arc'hant  
Biskoaz n'o deus chalmet va ehalon,  
Me'zo eur paourkeaz pafsant  
Kontant edon em fozision  
Met va fried karantezus  
A gollan hirio, pebez anken !  
Gwellt ha n'oun ket maleürus  
C'honec'h krouadur am eus em lochen. *(bis)*

2.

En amzer m'ou beo va fried  
He furnez a ehalme va c'halon  
Va bugale ouz va c'harat  
A roe d'in konsalasion  
Beb cil holl e poken d'eze  
Eun tad eurüsoch ne vo liken  
Dre o jestou tener bemde  
Edon eurüs ebarz em lochenn. *(bis)*

3.

D'ar mintin pa 'zan d'ar parkou  
Adarre da gommans va dervez,  
E lezan va bugaligou  
Eus va zi da gemeret evez.  
Hag en noz pa deuan en dro  
Evit va distrei eus va auken  
En em stardont holl war va zro  
D'am c'honsoll ebarz em lochen. *(bis)*

4.

Bras eo va laouenedigez  
Pa vezan er gêr gant va ziad.  
Met pa welan va merc'hig kez  
An dour a deu war va daonlagad ;

Seblantout a ra d'in gwelout  
He mamm dener ebarz em c'hichen,  
En despet d'am e'heuz diremet  
Oun c'hoaz eürus ebarz em lochenn. *(bis)*

5.

O, ma c'hellfen hep kaout mizer  
Sevel ha deski va bugale  
E c'hellfen c'hoaz gant an amzer  
Fortunia va merc'hig, marteze.  
Kapabl da labourat an dachenn  
Neuze va faotred a vo bras  
Em c'hozni me a c'hello c'hoaz  
Beva eürus ebarz em lochenn. *(bis)*

6.

Eurusoc'h c'hoaz me 'd'em gavo  
P'o gwelin o c'hounit o bara.  
Neuze pa zeulo ar maro  
Eus ar bed-man d'am delivra  
Va mignoned am interro  
Gant va fried pe en he c'hichen.  
Ha va bugale a ranno  
Va zamm tiegez ha va lochenn. *(bis)*

7.

Em gwele douar pa vezin  
O repoz e bered Rumengol  
Plijet kemier truez ouzin  
O Itron Varia Remed-Holl !  
Ha pa deulo va bugaligou  
War va bez da ober o fedenn  
Va Doue c'houi a hardouno  
Da ene paour Intanv al Lochen. *(bis)*

"La Voix de son Maître", merket war diskou gramophone

# LE VEUF DE LA CHAUMIÈRE

1.

De tous les riches d'à présent  
Je n'envie pas la richesse.  
Je ne suis qu'un pauvre paysan  
Qui vient de perdre sa maîtresse.  
La mort me ravit aujourd'hui  
La plus aimable ménagère,  
Voyez comme je suis réduit !  
J'ai six enfants dans ma chaumière. *(bis)*

2.

Lorsque mon épouse vivait  
Je l'adorais pour sa sagesse,  
Elle et puis mes enfants m'aimaient,  
Souvent me comblaient de caresses ;  
Je les embrassais tour à tour.  
Ah ! que c'était doux pour un père !  
Par leurs caresses chaque jour  
J'étais heureux dans ma chaumière. *(bis)*

3.

Le matin quand je vais aux champs  
Continuer mon labourage,  
Je laisse mes pauvres enfants  
Gouverner mon petit ménage  
Le soir quand je rentre chez moi,  
Pour me faire oublier leur mère,  
Ils viennent tous autour de moi  
Me consoler dans ma chaumière. *(bis)*

4.

Ah ! si je pouvais réussir  
A bien élever ma famille,  
Peut-être qu'un jour à venir  
Je pourrais marier ma fille,  
Alors mes garçons seront grands,  
Ils pourront labourer la terre.  
J'aurais espoir dans mes vieux ans,  
De vivre heureux dans ma chaumière. *(bis)*

5.

Et je serai bien plus heureux  
Si j' les voyais gagner leur vie  
Et si la mort fermait mes yeux,  
En tranchant le fil de ma vie,  
Tous mes amis m'enterreront  
Quand j'aurai fini ma carrière,  
Et mes enfants partageront  
Mon petit bien et ma chaumière. *(bis)*

6.

Lorsque du sommeil de la Foi,  
J'trai dormir au cimetière,  
Daignez avoir pitié de moi  
Vierge de Rumengol, ma mère !  
Quand mes enfants, dans ce saint lieu,  
Viendront prier sur ma poussière,  
Vous pardonnerez, ô mon Dieu !  
Au pauvre veuf de la chaumière. *(bis)*

m (mouez an itron Barz hag acordeon an aotrou Bars.)